



Gwerz ar

Sous-Marin « PROMETHÉE »

« Savet gant ar barz Francis MOAL » (Alc'houéder Léon)
war an ton anavezet e gallek - Quand on s'aime bien tous les deux -



I

War ar paourkeaz martoloded
Eun darvoud braz zo c'hoarvezet
A greiz m'edont e gwir vuez
Zint siouaz kollet da james
En deiz all, eun tamm raok kreisteiz
Zedho c'hoaz seder an dud keiz
En eun taol n'oar den vit petra
Ar Promethée jomaz a za
Ar vartoloded
Kerkent ioa spountet
Gwellet réent e zoan kollet

Diskan,

Ar Promethée zeaz fonz an dour
Eb gallout rei dezhan sikour
Kalz a c'houlenne gant truez
Lezer ganto ho zamm buez
Seiz anezho, ho deuz gallet
Ouz ar maro spountuz tec liet
A re all, zo beuzet siouaz !!
Ag a zo kollet da viskoaz.

II

A breman e fonz ar mor braz
E man ar Promethée siouaz
Ar Franz a ouel d'he bugale,
Kollet vit an eternité
Rankout lezer kreiz ho iec'het
Ho bugale ag ho fried
Evit mont e fonz ar mor doun
Gredfec'li ket pebez rann galoun
Gwellet armammou
Ar vugaligou
Noz deiz o skuilha daelou

Diskan

Kenavo va muiha karet
A lavar ar pried glac' harel
Perag ta ar maro iskiz
N'deuz da skoet kreiz da iaouankiz?
Perag ta kemer da vuez
O na pebez tristidigez
Kenavo va muiha karet
Eunhot, me a zonjo bepret

III

Francizien savomp hor moueziou
Duwarbenn ar sous-mariniou
Kag ne glaskomp ket a vrezel
Nemet ar peoc'h eternal
An traou ze a zo eur lac'h tud
Gemer ac'hanoc'h kreiz ho prud
A diefe beza difennet
Awoalac'h a dud vez kollet
O Franz benniget
Va bro ken karet
Ro huez d'ar Vartoloded

Diskan

Kemer truez ouz da vugale
A dalch sonj ouz ar Promethée
Sonj ebarz a re zo beuzet
Ag a zo evidet marvet
Lez eta ar Sous-Mariniou
A lac'h kement a iaouankizou
Dalc'li mad eta da vugale
A dalch sonj ouz ar Promethée

M'ho peuz eur phono...

... e kavoc'h pladennou «disques»
brezonek, re vras, e Brest, ag e leac'h all, en
tuez ma vezit e c'hober ho prenadennou. An
Aoutrou Georges SELLERS, eur muziker braz
brudet e Pariz, a zo e vuzikat ganen tre ma
kanan. Setu aman an diskou am beuz kanet da
ziveza : « Son ar Pinaud, Perak e choman
paotr yaouank, War bordig an dour, Gwir
Vretoned, An teodou fall, Ar plac'h diez da
gotantl »

Goulennit atao an diskou Gramophone
arreze eo re vella,